

STUDI HAG OBER



NIVERENN 13

PASK 1941

Studi hag Ober
Niv. 13
PASK 1941

TAOLENN

MARTEZE	1
Krapat gant ar Menez, gant HOU-CHE	2
Hent ar Basion, gant MAEN-TAN	4
Rannadur ar Brederouriez, gant MAODEZ GLANN- DOUR	20
Oberour gwrac'h ahez ? gant M. G.	31

MARTEZE.....

Marteze hoc'h eus ankouaet kas d'imp ho koumant. Hastit a-fo d'hen ober pe hon devo keuz ha keuz bras, o chom hep kas mui d'eoc'h niverenn ebet.

Mil bennoz Doue avat d'ar re o deus lakaet o faper en hent hep gortoz, ha dreistholl d'ar re o deus lakaet d'imp muioc'h eget an izelbriz. Ra gavint amañ da vihana, meuleudi ar merour d'ezo.

A-wechou e vez goulennet diganimp niverennou koz Studi hag Ober. Eus an niverennou holl, nemet an teir diweza, ne chom mann ebet ken... Koumantit, ar gwella eo !

Ma c'hoarvez ganeoc'h dianneza (mont en eur chomlec'h nevez), kasit d'imp kelou eus ho chomlec'h nevez, evit na vezo ket kollet ho niverenn nag evidoc'h nag evidomp.

Na lakit ket bilhedou en ho lizerou da gas arc'hant d'imp. C'hoarvezout a ra gant an avel o c'has ganti. Grit gant hon niverenn Chek-post.

Hag eur wech c'hoaz, bennoz Doue !

Ar Merour.

Taolit evez !

An niverenn a zeu a vo anezi « HON OFERENN », eul levrig 40 pajenn, ennañ eun displegadur aes ha beo eus lidou an oferenn.

Kaerderiou Lennegez Bro-Sina

KRAPAT GANT AR MENEZ

gant HOU-CHE

« Poaniomp !

Poaniomp !

Poaniomp ! Pignomp dalc'hmat ! »

Ya ! Ne droan ket zoken va fenn a-drek.

Ne dorchan ket zoken va c'houezenn.

Stenna 'ran va nerziou holl da grapat.

« A ! Setu buan tor ar menez.

Poaniomp !

Poaniomp ha pignomp dalc'hmat ! »

A daol-trumm, a-us d'in e paouez ar wenodenn.

Kregi 'ran neuze gant va daouarn er gwial glas,

Hag e harpan va zreid ouz ar brouzgwes

tarzet diouz frailhou ar roc'h.

Kammed ha kammed e krapan.

« Taolomp evez !

Poaniomp, ha pignomp dalc'hmat ! »

Gwrizioù ar gwez a rog va dilhad ;

An drein a bistig va daouarn ;

Goude mil boan e teuan a-benn d'ober eun hent ;

Hag e krapan davit al lein.

A ! Mat eo !

Eur wenodenn blaen a zo eun tammig uheloc'h.

« Poaniomp !

Stennomp hon nerziou holl d'he zizout. »

Eur wenodenn blaen, evit gwir, a droidell war grec'h :

Aze dudi ar bleuniou gouez,

Aze gwasked eur wezenn goz.

Gwall-skuiz 'oun avat,

Ha glebiet va dilhad gant ar c'houezenn

Ha brevet va diouc'har.

Gourvez a ran dindan ar wezenn ;

Alanat a ran c'houez-vat ar bleuñv,

Hag ar c'houk madoberus a grog ennoun...

Pa zihunan

Eo deuet an Noz ;

Ne weler ken ar wenodenn

Ha tavet eo ar c'halvadenn : « Poaniomp !... »

Sonjomp da vat !

Sonjomp da vat !

Amañ chomin em c'hoazez betek tarz an deiz ;

Gant ar goulou ez in kuit en dro

da gaout an uhela holl

Hag aze ' arvestin ouz sked estlammus ar Sav-Heol.



HENT AR BASION

gant MAEN-TAN

Agnus Dei, qui tollit peccata mundi.

Danvadig an Aotrou Doue, pec'hedou ar bed war e gein.

Pelec'h emañ henoz douster Betlehem ha Nazared, bugeliez ha yaouankiz ha buhez kuzet hon Salver ? Tremenet int. Tremenet eo ivez e deir bloavez-prezegerezh, pa veze a bep eil selaouet ha dislavaret, heuilhet hag enebet ; pa veze gantañ, da vihana, dalc'hmat, e ebestel ; pa lavare e Dad diwar e benn, evel deiz e vadeziant e-tal ar Yordan, ha deiz e sklaerder war verez Tabor : « Hemañ eo va mab muia-karet ». Pa gerze ar re gamm, pa wele ar re dall, pa ziwane buhez er re varo, ken alies ger a lavare da serri o genou d'e enebourien.

Bremañ e chomimp e Jeruzalem, kêr David, ha kêr an Aotrou Doue. N'eus ken nemet poan da gaout, ha glac'har.

Jesuz a oa deuet da Jeruzalem deiz sul ar Bleuniou, dous hag izel e galon, e-pad ma oa ar bobl, bras ha bihan, paour ha pinvidik, o c'houzilha (gouzeria) an hent gant o dilhad ha gant deliou ar gwez, hag o youc'hal d'ezañ : Hozanna ! Meuleudi da vad David ! Bennoz d'an hini a zo deuet a-berz an Aotrou Doue ! — Hag an nerz a lakae ar bobl da youc'hal ar meuleudiou-se a oa ken kreñv, ken, ma vije bet tavet an dud, ar mein o dije youc'het en o flas.

E-pad an deiz-se, hag e-pad al lun, hag e-pad ar meurzh, e prezegas Jezuz en Templ. Met pep noz e ranke mont da Vetania da gousket, rak den ebet e Jeruzalem ne grede rei d'ezañ nag e goan nag eur gwele, gant aon rag ar pennou bras o devoa droug outañ.

Ar merc'her a dremenas, moarvat o pedi, a-hed an deiz hag a-hed an noz. E keit-se, Judaz a glasse gwerz d'e vestr. D'ar Yaou ar beure, e teuas Jezuz da Vetania adarre, da zegas kelou d'e Vamm, da Vari Vadalen, ha d'e vignoned, e oa prins an deñvalijenn o vont da veza dishualet, ha Mab an den o vont da goueza dindan c'halloud ar bec'herien. En noz-se, Jezuz a zebras e goan diweza, a lavaras an oferenn genta, a ginnigas e Sakrifis diwad, da c'hortoz kinnig en deiz warlerc'h, e sakrifis gwadek.

Satan en em silas neuze e Judaz : « Hast buan ober ar pezh ac'h eus d'ober ! » eme Jezuz d'ezañ. Noz e oa. Judaz a yeas e-maez ar sal. Mab Doue a oa o vont da veza gwerzet evit tregont skoed arc'hant.

Treitour ! A ! Malloz d'it !

Tregont pezh arc'hant, Roue an neñv hag an douar !

Tregont pezh arc'hant, ho Salver, Kristenien !

Tregont pezh arc'hant, ho Mab, o Mari ! [ded !

Tregont pezh arc'hant, an eil Person eus an Drein-

Ma ne vije bet gwerzet c'hoaz, nemet gant Judaz ! Gant Pêr e vo gwerzet ivez, ha nac'het dre vez ! Gant Kaifaz, dre gasoni ! Gant Pilat, dre aon ! Gant pec'herien an holl amzeriou, evit pennadou lore'h, kalonadoudou kasoni, korfadou plijadur !

O Jezuz, ganin oc'h bet gwerzet ivez ! Met dre garantez, dre vadelez, dre zouster, n'hoc'h eus ket la-

varet 'us d'am fenn ar geriou spontus a gasas korf Judaz betek ar groug, hag e ene betek an Ifern ; Gwelloc'h e vije d'ezañ ma vije bet staget eur maen ouz e c'houzoug ha ma vije bet skoet er mor, rak en gwasoc'h eget ar mor e kouezo, e mor an tan hag ar boan, e mor ar malloz peurbadus, elec'h ma vo gar-madeg ha skrignadeg-dent ! »

Met Jezuz a groze ar c'homzou-se en e c'henou n'eus c'hoaz nemet eun eur-orolaj, a hañval beza bremañ dic'halloud-kaer. Sellit-hañ e liorz an Olived ; e-unan emañ. E ebestel, a zo aet unan anezo da lavarout da briñsed ar veleien : « Roit d'in soudarded, ha ma n'ouzont ket e piou o deus kregi d'ober, n'o deus nemet sellout hag an hini a welint ac'hanoun o pokat d'ezañ, hennez a vo. »

Eus an unnek abostol all, e oa chomet eiz e-tal kloued al liorz ; an tri muia karet en doa Jezuz kaset gantañ, tostoc'h d'ezañ, da c'hallout klask en o c'hichen frealzidigez ha diboa ar vignoniez d'e baour kaez ene trist betek mervel.

Heñ a yeas pelloc'h c'hoaz, ha neuze e kouezas war e c'henou, ledet war an douar. Ha kement pec'hed a zo bet graet hag a vo graet e-touez an dud, abaoe pe-c'hed kenta Adam betek pec'hed diweza diweza den a vo er bed-mañ, pec'hedou ar re varo, pec'hedou ar re veo, pec'hedou ar re na oant ket krouet c'hoaz, ar pec'hedou bet pardonet d'ar Sent, ar pec'hedou beo hag hudur en ene ar re daonet, al leou-doue, al labour sul, lezennou digristen ar broiou, ar skoliou dizoue, ar gelennadurez fall roet d'ar vugale, an disentidigez, ar gasoni, al lazadegou, ar pec'hedou lous, al laeron-siou, ar gevier er c'homzou hag er skridou, a zihunas

e poull-kalon pep pec'her evel ma tihun al loened-gouez en o zoull da vont da chaseal, hag eus paleziou an impalaerien, ar rouaned, an aotrounez, hag eus ti-soul ar paour, hag eus kreiz an den koz poaz gant eur vuheziad dizurz, hag eus kreiz an den yaouank bervet e wad gant an techou fall, hag eus kreiz ar c'hristen lous e ene goude beza bet badezet e dal, eus pevar c'horn an douar, hag eus dounder puñs an Ifern, evel chas, evel bleizi, e teredent etrezek liorz an Olived, hag e lamment war Jezuz, astennet a-hed e gorf war an douar noaz.

Selaouit ha komprenit, Kristenien ; komprenit mister Mab Doue deuet da veza sammel gant hon pec'hedou, hag o poanial dindan ar bec'h, o poanial evidoun, o poanial evidoc'h ! Ha mar chom ho spered digompren dirak kement a fallagriez eus ho perz ha kement a vadelez a-berz ho Salver, ma chom ho spered stouvet, digorit ho kalon da vihana.

A ! Euzi a ra Jezuz pa sant kement a zizurz hag a loustoni, evel naered ha touseged, o stoka ouz e ene santel. Ha mar n'o dije graet nemet stoka ! Brevet eo gant samm an holl bec'hedou ! Gwisket eo gant mantell an holl dorfedou ! N'eo ket heñ en deus pec'het ; pephini ac'hanomp a oar, siouaz ! gant piou int bet graet ! Hon pec'hedou a zo warnañ, n'int ket ennañ. Ha koulskoude, an Aotrou Doue, dindano, ne wel ken e Vab. Justis an Aotrou Doue, en eur skei war ar pec'hed, a skoio warnañ elec'h skei warnomp ; ha goude beza douget fallagriez ar pec'hed e tougo ivez ar boan hag ar c'hastiz.

Hag ar boan-se, hag ar c'hastiz-se a oa garo spontus, evel eur werennad dour c'houero a vije ret eva betek an diweza heradenn. Ret e vo da Jezuz beza drailhet

ha dispennet ken ne vo tamm yac'h ebet en e groc'hen ken, adalek e benn betek e dreid ! Ha goude kement-all a boan, mervel war eur groaz ! Jezuz, spontet, a wel ar skeud anezi o para dirak e spered. « O va Zad, emezañ, va Zad ! me ho ped, pellait diouzin ar c'halir-mañ, mar deo ho polontez ! » Biskoaz betek neuze n'en doa ranket goulenn diou wech digant e Dad, ken alies pedenn a rae a veze selaouet. Met en deiz-se... En deiz-se e pede hag e talc'he da bedi hag an anken a waske anezañ ken start ken e ruilhe dour ha gwad warnañ, ken e tivere e c'houezenn ruz a daka-dennou war al liorz. Met Bolontez Doue a oa salvi an dud, ha kaout eun digoll evit ar pec'hed n'eus forz pegen ker e koustfe d'e Vab. Ha Jezuz a lakaas e galon baour, ar galon wak a oa ennañ evel e pep oen, da zegemer bolontez kalet an Aotrou Doue. Eun ael a ziskennas eus ar Baradoz da rei nerz d'ezañ, ha stouet bepred dirak skeudenn e Groaz, e lavaras : « Va Zad, mar n'hell ket ar c'halir-mañ tremen hep beza evet ganin, ho polontez bezet graet ». Hag an Ael a nijas kuit da gas ar bedenn-se betek tron an Tad.

O koad santel kroaz Jezuz ! Me ho salud evel m'ho saludas va Salver ! Heñ en deus kavet warnoc'h e varo, ha me a gav ennoc'h va buhez ! Me ho salud evel va Salver, gant Feiz ! Feiz en madelez an Aotrou Doue, kuzet dindan ho koad kalet hag o tachou lemm !

O Crux, Ave, spes unica !

O Kroaz, ni ho salud, silvidigez unek !



Teir gwech e oa deuet Jezuz davet e dri abostol,

met pounner e oa o daoulagad, ha n'o doa ket graet nemet kousket e-pad ma oa o Mestr en anken hag er glac'har. Judaz avat ne gouske ket. Judaz ne oa ket pounner e zaoulagad ! Klevet e veze an treitour o tont. Tregont pezh arc'hant en deus da c'hounit, n'eo ket 'ta ? Ha pa vezint gounezet ez aio d'en em grouga. Jezuz ivez ne gousko ket fenoz, na nozvez all ebet ken war an douar, nemet en gwele yen ar bez.

Eur pok war dal Jezuz... « Salud, Mestr ! »... ha setu Jezuz etre daouarn e enebourien, setu e ebestel o redek kuit, nemet Yann ha Pêr. A ! pebez nozvez en doa da dremen, ha goude an nozvez-se, pebez devez ! Ti Anna ! Ti Kaifaz ! Fals-testou, skouarnadou, nac'hadennou Pêr, ha prizon ! Lez-varn Pilat, ha Jezuz stag ouz eur pilher, hag an taoliou skourjez. oc'h arat e gein, hag e wad santel o strinka war an dud en-dro d'ezañ. Soudarded Herodez o c'hoapaat an Eil Person, Furnez an Dreinded ! Soudarded Pilat o kuruni gant spern ar Roue Holle'halloudeg, hag o voucha daoulagad an hini a wel pep tra, hag a lenn en o c'halon evel en eul levr ; hag o plega o glin, dre fent, evit farsal, dirak an Hini a varno anezo da holl viken.

Sellit, Kristenien, etrezek ar pondalez a zo dirak dor kastell Pilat. Sellit, pegen kaer, goude beza dispennet ; pegen kaer, liou ar garantez warnañ ; pegen kaer gant e vantell ruz, pegen kaer, an hini n'eo ket eun den, n'eo ken nemet eur preñv, kement ha m'eo bet mac'het, ha deuet da veza dishenvel diouz an dud, dre forz beza boureviet.

Selaouit, Kristenien, selaouit Pilat o lavarout : « Sell amañ an den ! » Ezomm awalc'h a oa eun test da rei testeni eo hemañ den c'hoaz, goude beza bet

friket evel avalou gant ar wask, dindan kounnar e Dad, fallagriez an dud, ha brouez an Ifern. Ha peogwir n'emaint ken gantañ, ar re en deus karet muioc'h eget an dud all, e Ebestel, da rei testiñ ez eo Doue ha Mab da Zoue, te, Pilat, te, lavar d'imp da vihana eo eun den, eun den eveldomp, dishañval diouzimp hepken dre ar pec'hed, n'en deus graet biskoaz, hag ar c'hastiz, en deus gouzañvet en hon lec'h.

Selaouit c'hoaz, selaouit ar youc'hadeg emañ ar bobl o youc'hal war blas Kêr ; selaouit eno hag en dro d'eoc'h bemdeiz al le-doue a zalc'h da dregerni en istor ar bed : « Laza hemañ ! Rei d'imp Barrabaz ! N'houlomp ket hemañ da roue ! Staga anezañ ouz ar groaz. Ar pardon d'al laer. Ar groaz d'an den santel. Rei d'imp ar pec'her ha rei Doue d'an Ankou. »

Selaouit, selaouit c'hoaz ! Pilat en eur walc'hi e zaouarn a roas anezañ d'ar Judevien da staga ouz ar Groaz. — Gwalc'h da zaouarn, Pilat, ha lavar d'in pelec'h e kavin dour da walc'hi da ene ! An den ac'h eus roet da laza, Pilat, an dañvad ac'h eus roet d'ar bleiz, an Doue ac'h eus barnet d'ar maro, hennez, Pilat, eo gwalc'her an eneo, hag e wad eo an dour !

Ar soudarded a lakaas war ziskoaz Jezuz ar Groaz a dlee beza staget warni, hag a gasas anezañ ganto e-maez ar porz.

O koad santel Kroaz va Jezuz, me ho salud, evel m'ho saludas va Salver, pa ho kwelas gant daoulagad e gorf. Me ho salud gant Esperañs. Ret e oa d'hon Salver mervel warnoc'h evit mont d'e c'hloar. Ha me ivez a rank tremen dre Galvar ar binijenn hag ar boan, ar c'hleñved hag ar maro, evit mont d'ar Baradoz.

O Crux, Ave, Spes unica !
O Kroaz, ni ho salud, silvidigez unek !



An den a Feiz, gant sikour gras Doue, a c'hell peurvuia hep re a boan degemer ar Groaz sammet war e skoaz, ar c'hleñved sammet war e gorf, ar glac'har sammet war e galon gant Doue. An diaesa eo mirout anezi, ha dere'hel da vont ganti daoust pegen pounner e teu da veza dre ma teuer da skuiza, daoust d'an stronsa a ra an troad o ruza war an douar, daoust d'an dud difeiz o tispriza hag o c'hoapaat ar c'hristen diskiant awalc'h evit plega da c'hourc'hemennou re bounner an Aotrou Doue. Int da vihana, emezo, a c'hell kerzout skañv, ha sellout ouz ar bed en dro d'ezo, kemer o flijadur, ha mont elec'h ma karont, ha sevel o fenn, ha diskouez ez int tud ! Ha mar deu d'ar c'hristen koueza, e sav c'hoarzadeg, ha goapadeg, ha skrijadeg !

Sonjomp neuze e Jezuz, ar soudarded hag ar Judevien war e lerc'h, o pignat war venez Kalvar.

Sonjomp e Jezuz kouezet teir gwech, ha goulennomp digantañ nerz da sevel ha nerz da zerc'hel da vont, hag ivez eur mignon bennak, eeun e galon ha gwir gristen, da zougen lod eus hon c'hroaz, evel Simon Kurena.

Ha mar deu gant ar groaz a zougomp, paourentez, dizenor, pe boan-gorf, pe boan-spered, ranna ar c'halonou a zo an tosta ouz hon c'halon, soñjomp e Mari, sioul ha glac'haret, o heuilh he Mab war Venez Kalvar.

Ar prosesion a dremen, marc'h ar c'habiten er penn araok, soudarded war e lerc'h, hag en touez ar sou-

darded, tri den : daou eus ar re-mañ, unan end-eeun, a zo du o sellou ha liou an torfedou warno. Laeron int. An trivet, an hini a zo er c'hreiz, hag a zo muioc'h daoubleget dindan bouez eur groaz pounneroc'h, a zo karantez ha pardon leiz e zaoulagad ; hennet eo Jezuz hon Doue, lakaet abalamour d'imp e renk al laeron. An dud a zo er prenestrou ha war an hent ; kalz a ya da heul da welout penaos e varvo an hini a huchent warnañ disul diweza : « Enor da Vab David ! » Ar Judevien a ra goap ! Ar soudarded a wallgas anezañ, ha pa gouez, e vezont en dro d'ezañ, evel kigerien en dro d'eul loen diskaret — evelse emaint en dro d'ho mab, o Mari !, en dro da Jezuz, en dro d'an Aotrou Doue !

Kaset eo bet ganto betek lein ar menez. Diwisket o deus d'ezañ e zilhad. Ledet o deus anezañ war ar Groaz, kaletoc'h gwele eget laouer-vaen kraou Betlehem. Hag heñ a zo etre o daouarn evel ma veze gwechall gant ar Werc'hez Vari, pa oa eur bugelig bihan, ha pa veze hi o lakaat anezañ da gousket. E zaoulagad a zo savet etrezek an neñv ; astennet o deus d'ezañ e vrec'h. Pa glevas Mari an taol morzol kenta, ha pa welas korf Jezuz o reudi gant ar boan, pebez rann-galon eviti ! evel ma vije bet ar morzol o koueza war he c'halon-hi ! Bremañ e skoont taol ha taol. Aet eo an tachou er c'hig ! aet eo an tachou er c'hoad ! E-pad keit-se, darn all o deus graet eun toull da blanta troad ar Groaz. Prest an tacherien, prest an doullerien, en em lakaont da wernia ar Groaz en he sao, hag ar stroñs a wasa c'hoaz poaniou kriz hon Salver Jezuz, a-istriblilh a-bouez pevar gouli. Neuze emañ e boaniou en o gwas. E izili a zo gwad enno c'hoaz, c'hoaz ez int beo ha tener ha nevez-diframmet.

Neuze ivez eo e lavar : « Va Zad, pardonit d'ezo, n'ouzont ket petra 'reont ! »

Pardon ! Ar vourrevien ne reont van ebet ouz pardon ! O spered a zo gant traou-all ; rak beza 'z eus tud na reont van nag ouz poaniou nag ouz maro, nag ouz pardon, nag ouz silvidigez, pa vez madou da skrapat. Ar soudarded a oa oc'h ober peder lodenn gant e zilhad, unan evit pep soudard, rak hervez al lezenn, an dilhad-se a oa d'ezo. E sae avat a oa hep gwri, en eun tamm adalek ar c'hrec'h betek an traoñ : « Na droc'homp kret houmañ, emezo, met tennomp plouz berr da welout da biou e vo ».

Arc'hoaz, Kristenien, e vo gwelet e kazarn Jeruzalem pevar soudard o kanna tammou dilhad, hag an dour a zeuio da veza ruz, ruz gant gwad, gwad eun Doue.

Teir eur en deus Jezuz da chom aze, ha neuze e varvo. Teir eur e talc'ho tud da dremen en eur ober goap, ha pennou bras ar Judevien, e pad teir eur, a chomo eno ivez da skignal o dent, evel bleizi o krignat eskern an dañvad o deus taget ha debret, o krignat evit ar blijadur da santout c'hoaz blaz ar gwad, ha da glevout eskern al loen paour o c'hri-gonsat dindan o dent. — War ar C'halvar ar bleizi a oa tud, hag an dañvad a oa Doue !

En desped d'ezo, dre urz Pilat, e oa bet staget us da benn Jezuz eur skritell gant ar geriou-mañ : Jezuz a Nazared, Roue ar Judevien.

Jezuz, e ano santel degaset war an douar gant eun ael, a oa staget amañ da veza dismegañset : Jezuz, da lavarout eo, Jezuz ar gaouiad, Jezuz laer rouantelez, Jezuz ar gwallbrezeger.

Jezuz a Nazared : Nazared, ano dous, peadra da

zegas soñj d'ezañ eus e vugeliez e ti ar Werc'hez, Nazared, eme ar Judevien, ano dizenoret da holl viken, o veza bet bro eun den evel Jezuz.

Jezuz Roue ar Judevien ! A ! en taol-mañ, e trelatont. Roue ar Judevien, hennez ! Biken ! Ha pa ne fell ket da Bilat disverka ar geriou-se, diskouezomp da vihana emezo, n'int nemet gevier.

Ma'z out Mab Doue, diskenn alese !

Ma'z out Roue Israel, diskenn diwar da Groaz !

O Roue Israel, aze emañ da dron ?

O Mab Doue, aze emañ da Varadoz ?

« O Krist » eme al laer kleiz « evelse e savetevez ar re a zo war da heul ? »

Piou a gompreno fallagriez an den ? Ar Judevien, milierou a vloaveziou a oa, e veze Doue o tegas d'ezo sklerijenn dre ar Brofeted, o rei d'ezo lezennou evit o santelaat, a-benn an deiz merket evit donédigez hon Salver, da zegemer anezañ da genta ha da vont goude da brezeg e ano dre ar bed-holl. Hag elec'h degemer anezañ, e reont d'ezañ mont da glask eur gavel e Betlehem e lojeiz al loened, hag e lazont anezañ. Hag elec'h embann e ano, e lakaont anezañ war eur groaz e-touez an dorfetourien, ha c'hoaz unan eus ar re-mañ a laosk malloziou warnañ. A ! Kalet eo kalon an den ! beza ken tost da Jezuz, beza o sellout ouz e varo, beza dindan e wad o vera ha mont da goll evelkent.

Ma'z eus bet biskoaz pec'herien war an douar, hag a vefe bet grasou an Aotrou Doue en dro d'ezo, eo sur mat an daou laer a oa e kroaz a bep tu d'hon Salver. Evel Aeled, evel gwenan, e oa grasou o klask mont en o c'halon, o c'hortoz digor, o skei war an nor, o lakaat enno keuz evit ar pec'hedou tremenet, spont

ouz an Ankou hag an Ifern. Met mestr e chomont d'ezo o-unan. Ha Jezuz, beuzet en e boan hag en e wad, o vont da vervel evit ar bec'herien, a wel stok outañ, e kroaz eveltañ, eur pec'her o vont da veza daonet. Jezuz a ginnige e boaniou d'e Dad. Hag ar poaniou-se a oa kriz awalc'h evit terri kounnar an Aotrou Doue, ne oant ket kriz awalc'h evit teneraat kalon ar pec'her. Da gen alies huanadenn pe glemmadenn skañv a zeue diwar vuzellou Jezuz, al laer kleiz a responte gant eur malloz : « Ma'z out ar Christ, tenn ac'hanomp ac'hann ! »

Al laer dehou a respontas d'ezañ : « Ez omp o vont da vervel eveltañ, ha n'ac'h eus ket doujañs Doue ? Ni 'oa dleet se d'imp, met hemañ n'en deus graet droug ebet. Aotrou, emezañ da Jezuz, pa viot en ho rouantelez, dalc'hit soñj ac'hanoun. — Hizio, eme Jezuz, e vi ganin er Baradoz. »

Abaoe an eur a greisteiz, pa oa bet staget hon Salver ouz ar Groaz, e oa deuet an amzer da deñvalaat. Dre ma kolle Jezuz e wad hag e liou, an heol a golle e sklerijenn tamm ha tamm. An deñvalijenn a greske hag en em astenne war an douar. An natur evel eur vamm mantellet e du, a oa o tougenn kañv d'he mah.

Ne oa ken kement a dud war dro. Skuizet o vallozi, sklaset gant ar spont, o welout an noz deuet da drouc'ha nerz an deiz, en em silent kuit, an eil war lerc'h egile.

Neuze e tostaas ouz ar Groaz teir maouez hag eun den yaouank : ar Werc'hez deuet da unani he daerou gant gwad he Mab ; ha Mari Kleofaz, he c'hoar, ha Mari Madalen ar bec'herez vras, ha Sant Yann, an diskibl karet. Ar pevar-mañ, da vihana, a gomprene ar garantez a verve neuze e kalon eun Doue hanter-

varo, o leski e kreiz ar boan evit eur bed pec'her. Ar re-mañ a gomprenne talvoudegez an eneou, skrivet gant lizerennou kig ha gwad war gorf Jezuz.

Jezuz a welas anezo en o sao en deñvalijenn en e gichen : « Itron, emezañ d'ar Werc'hez, setu aze ho Mab ». Ha da Sant Yann e lavaras : « Setu aze da Vamm ».

Ne van netra ken gant Jezuz war an douar ; betek e vamm en deus roet d'an dud. Pelec'h e klasko sikour ha frealz bremañ ? en Neñv ? digant e Dad ? E Dad ne wel ken nemet ar pec'hedou a zo warnañ, hag a sko, kalet ha didruez, ken e oa klevet Jezuz o klemm : « Va Doue ! Va Doue ! Perak oc'h eus-hu va dilezet ? »

Jezuz n'eo ken nemet eur paour kaez den o vont da vervel. « Sec'hed am eus ! » emezañ. Eur soudard a ro d'ezañ da suna eun tamm spoue leun a win trenk !

Neuze e taolas eur sell war e vuhez, hag o welout en doa sentet ouz e Dad penn da benn, prezeget gwirioneziou ar Baradoz, roet skouer eur santelez hep he far, gouzañvet an holl boaniou hag en e ene hag en e gorf, e lavaras : « Peure'hraet eo ! Echu am eus va labour. — Va Zad ! emezañ, ken kreñv ken e oa strafuilhet an holl, va Zad ! etre ho taouarn e lakan va ene ! » Hag e laoskas eun huanadenn. E benn a gouezas war e gerc'hen. Maro e oa.

Tri bloaz ha tregont a oa padet tremen an Aotrou Doue war an douar.

Neuze e kreiz an deñvalijenn, an douar a grenas, ar rec'hell a faoutas, lien bras an Templ en em rogas, hag an traou divuhez a euzas evel m'o dije komprenet torfed an den ha madelez Doue, hag evel ma

vijent bet spontet o welout pegen bras e oa an eil hag eben. Eneou an dud a grenas, hag ar c'halonou en deñvalijenn a glaskas dre zastorn gras Doue. Biskoaz n'eus bet misteriou a-us d'an dud evel ar re a oa neuze o para war Venez Kalvar : « Sur mat » eme an ofiser, « an den-se a oa Mab Doue ! ».

Ha ni, da heul an douar o krena, hag ar rec'hell o frailha, evel an heol o lemel e sklerijenn diwar ar re o doa lazet Jezuz — Heol ar Baradoz —, evel an ofiser oc'h anzav en doa lazet eun Doue, evel ar re varo o sevel eus o bez, saludomp Kroaz Jezuz, saludomp gant karantez, hon Salver maro dre Garantez.

O Crux, Ave,

Reis dele crimina...

O kroaz, ni ho salud,

Raskit torfedou ar re gablus...



Ne gomprenfe netra, netra, e maro-hon Salver, an ene na gomprenfe emañ aze war eun dro, o skei war Jezuz 'n e Basion, justis ha madelez Doue.

Justis Doue da genta. A ! Kaout d'ober gant an Aotrou Doue n'eo ket c'hoari ! Ha pep den war an douar en deus d'ober gantañ, betek en e oberou distera, pe eo mat d'ezañ, pe n'eo ket. Ar pec'hed n'eo ket eur c'hoariell, peogwir eo bet ret d'eun Doue gouzañv kement all a boan da baea evitañ, ha peogwir e sko Doue warnañ ken kalet. N'it ket da gredi e oa fallagriez ar Judevien hepken o tiframma e zilh had peget ouz e gein gant e wad dizec'het, hag o staga anezañ gant tachou ; Doue a oa o kastiza war e gorf santel plijaduriou diroll hon c'horfou lous. Paour e oa, betek beza en noaz ; Doue a oa o kastiza warnañ

hon daoulagad re stag ouz madou ar bed. Savet eo war eur Groaz etre daou laer, abalamour da Jeruzalem, abalamour d'an neñv ha d'an douar, d'ezo da welout Doue o kastiza war enor ar C'hrist, lore'h an dud hag o brasoni. Ret eo d'ezañ senti ouz ar Judevien, ouz Pilat, ouz ar soudarded, abalamour d'an dud, abalamour d'ar gristenien n'houlont ket senti.

A ! nann ! Kaout d'ober gant an Aotrou Doue n'eo ket eur c'hoari ! rak ma 'z eus bet graet evelse d'ar c'hoad glas, d'hon Salver Jezuz hag a oa beo e ene gant buhez Doue en e greiz, ma 'z eo bet trouc'het ha torret, ma 'z eo bet graet skilhou gantañ, goude ne oa ket ar pec'hed ennañ, met warnañ hepken — penaos e vo graet d'imp koad sec'h ? Mar ne vez ket gras Doue ennomp, mar bez ar pec'hed en hon c'hreiz, e vezimp skoet en tan ; ha pa vezimp war ar varyskaon, pa vo lakaet ar grusifi etre hon daouarn, elec'h gwelout warni eun Doue marvet evidomp ha kemer fiziañs dirak ar bed all, e welimp pegen garo e vo planedenn ar pec'her dindan morzol kounnar Doue. Ret e vo d'imp ober pinienn er bed all en desped d'imp.

Ha koulskoude kalz muioc'h c'hoaz eget e justis enep fallagriez ar pec'hed, Madelez Doue evit ar pec'her en em ziskouez war Venez Kalvar. N'eo ket Jezuz ; c'houi ha me, a dlefe beza bet staget ouz ar Groaz, hag an Aotrou Doue a zo aet en hon plas, ar mestr da brena e vevel, ar C'hrouer da brena e grouadur. Spered an den a zo re zister da gompren eur garantez evel hounnez, ha komzou eun den re yen da ziskleria nerz eun tantad-tan ken bras. Gwir brezeger ar Basion eo Jezuz war e Groaz. Sellit pet ha pet gouli a zo war e gorf, digor evel muzellou da

bokat d'o ene. Sellit outañ. Skuizit ho taoulagad o sellout outañ, ken e vo teneraet ho kalon, ken e vlot dic'hoantet diouz teil an douar, ken e ruilhø an daerou eus ho taoulagad.

+ + +

RANNADUR AR BREDEROURIEZ

gant MAODEZ GLANNDOUR.

Penaos ranna ar Brederouriez ? Pere al lodennou a vefe enni ? Diouz ar pezh hon eus lavaret er pennad kenta, en eur zispartia ar Brederouriez diouz ar skiantou all, e teu buan awalc'h er spered ar soñj ne c'hell ken ar Brederouriez beza lodennet nemet en abeg d'he gouvezad, da lavarout eo en abeg d'ar pezh a zo anavet ganti. Rak diskleriet hon doa e oa daou dra d'ober eur skiant : 1° ar **gouvezad**, da lavarout eo, ar pezh a zo gouvezet, 2° eun doare d'hen gouzout, d.l.e. eun **doare-anadurez**. O veza ma 'z eo an doare-anadurez an hevelep hini a-grenn er Brederouriez a-bez, e chom eta ne c'hellimp ranna ar skiant-se, nemet hervez lodennou ar gouvezad e-unan.

Koulskoude, da varn an traou diwar ar pezh a lavar peurliesha an dournlevriou Prederouriez, ne vefe ket evelse. Rak degas a reont evel gwir-bater, da ranna ar Brederouriez, pennvenoziou all, ha displega a reont al lodennadur lakaet war ano Kristianus Wolf (1679-1754), brasa diskibl Leibnitz : hemañ evit gwir, a ziforc'h etre Prederouriez-arvesti, ha Prederouriez-oberia.

Evit ma vo peursklaer d'imp, setu amañ ar rannadur-se e-unan, evel m'hen disklerier peurliesha, daoust ne gav ket d'in e vefe digant Wolf en holl d'an holl er stumm-se.

I. Prederouriez-arvesti pe arvestouriez

(Philosophia speculativa, metaphysica)

Arvestouriez hollek (metaphysica generalis)	}	Boudoniez = Studi ar boudou e kement ha boud. (Ontologia)
		Meizvarnouriez = Studi gwirionded ar reiz e keñver ar boud. (Critica)
Arvestouriez a-unanou (methaphysica specialis)	}	Bedoniez = Studi ar c'horfou dan-vezek. (Cosmologia)
		Eneoniez = Studi ar re veo. (Psychologia)
		Doueoniez = Studi Doue. (Theodicea)

II. Prederouriez-oberia pe oberouriez

(Philosophia practica)

}	Poellreizerez = A vlegn oberennou ar poell d'ar wirionez. (Logica)
	Youlreizerez = A vlegn oberennou ar youl d'ar peurvad. (Ethica)
	Kenedoniez = A studi ar gened ha penaos he c'haout en oberennou an arz. (Esthetica)

Hogen araok barn ar rannadur-se ha diskouez he falsentez, ez eo ret d'in degas eun tamm sklerijenn war ar menozioù ma ra ganto. Hervez Wolf eta e vefe ar Brederouriez-arvesti (speculativa), an hini a glask hepken gouzout evit gouzout, diskleria traou ar bed evit o diskleria. Ar brederouriez-oberia (practica) a vefe en enep an hini a glask gouzout evit mont d'an ober. Evel m'emañ ar medisinerez eur skiant-oberia a bleustrer warni evit beza barrek da barea an dud, evelse emañ ar Brederouriez-oberia ; nemet amañ war dachenn ar Brederouriez, e klasker reolen-

nou penna holl an ober, ar reolennou uhela, penaos e tleer en em zibab e-keñver ar Gwir, e-keñver ar Mad, e-keñver ar C'haer.

Barnomp da genta an disparti meur-se, Prederouriez arvesti ha Prederouriez oberia, ma ra Wolf gantañ.

Gouzout mat a ran ez eus skiantou-oberia (scientiae practicae) a vez stummet disheñvel diouz ar skiantou-arvesti (scientiae speculativae). Hogen lavarout a ran ne c'hell eur skiant-oberia beza nemet diwar ha goude eur skiant-arvesti war an hevelep danvez. Setu perak ez eo fals rannadur Wolf, pa droc'h ar Brederouriez etre speculativa ha practica.

Displegomp hiroc'h eun tammig an dra-se. Eur skiant-arvesti eo an hini ma seller enni ouz an dra o klask gouzout ar muia ar gwella. Mont a reer ganti al ledana, an douna a c'heller. Eur skiant-oberia en enep, douget ma 'z eo davit an ober, ne sell en eun dra nemet ar pez a dalv evit an ober, ha dilezel a ra kement n'hall ket servijout. Ouspenn-se, e-touez ar pez a c'hellfe servijout d'an ober, eo ret c'hoaz d'ar skiant-oberia dibab, rak re ez eus peurliesha gant an doareou-ober dishenvel a c'hellfe beza implijet : n'heller ket ober gant an holl a-gevret, met gant unan hepken ha ret eo eta dilezel ar re all.

Kemeromp eur skouer : ar **Skrituroniez**. Ar Skrituroniez eo skiant-arvesti eus an holl skrituriou bet implijet a viskoaz gant Mab-den abaoe ma 'z eus Mab-den, hag a c'hellfe beza implijet gantañ ; e-giz skiant-arvesti e sell ouz pep doare skritur gant an hevelep dudi, gant an hevelep aked, rak pephini a zo eur blijadur heñ anavout. — Hogen pa fell d'eoc'h deski skriva d'eur bugel, petra 'rit : dibab eun doare

skritur hag unan hepken, rak gouzout mat a rit ne c'hellot ket sankha e penn ho teskad ar c'hustum d'ober gant dek skritur war eun dro. Ar skiant-oberia eo ar pez hoc'h eus dibabet er skrituroniez d'heñ deski d'ober d'ar bugel. — Ha bremañ, diwar-se e welit mat ne c'hell eur skiant-oberia beza nemet e vefe ivez eur skiant-arvesti war an hevelep dachenn ; ha nen eo ar skiant-oberia nemet eul lodenn bet tennet eus gouvezad ar skiant-arvesti, nemet ar pez a zo ret heñ gouzout evit an oberenn a venner, ha kement-se hepken.

Pa ra eun den eur fazi, ez eus bepred eun abeg bennaek d'ezañ. Peseurt abeg avat a vefe gant fazi Wolf ? Hemañ : treuskemeret en deus ar skiant eus ober ar spered evit eur skiant-oberia. Skiant an ober eo an hini he deus an ober da c'houvezad, eur wirskiant arvesti anezi ; an hini he deus avat an ober da vennad, an hini a venn mont d'an ober, eo ar skiant-oberia hag hounnez hepken. (1)

En tu-hont da se ez eus c'hoaz peadra da damall e rannadur Wolf. Hogen, rak aon da vont betek re war dabutal ne rin nemet heñ nota berr ha berr. Evelse ne blij ket d'in gwelout ar Veizvarnouriez (critica cognitionis) e-kichen ar Voudoniez, el lodenn

(1) Mar implijer ar ger « sellad », e vezer trellet ha touellet aes-meurbet. « Sellad » a dalv « objectum », « ar pez a vez sellet ». Evelse e c'heller lavarout : « skiant an ober he deus an ober da sellad », hag ivez « ar skiant-oberia he deus an ober da sellad ». Setu dres, ar rouestladur ma ra Wolf gantañ, hep teurel pled ouz kement-mañ : e skiant an ober ez eo ar MEIZ a sell ouz an ober d'heñ anavout, — er skiant-oberia ez eo ar YOUL a sell ouz an ober da vont d'ezañ. Ar Brederouriez, evel m'heñ diskouez hec'h ano, a zo anezi hec'h-unan, tra ar reiz ; evel pep skiant, anezi hec'h-unan, a zo tra ar reiz.

anvet gantañ *Metaphysica generalis*. C'houez an Holl-gealouriez (idealismus) a santer aze betek re ; EUR boud e-keñver ar boudou all, EUR spered e keñver speredou all eo reiz an den. E studi a dlefe dont eta er *Metaphysica specialis*.

Ha perak envel *Cosmologia*, *Bedonie*, ar pezh a zo hepken eun *Danvezonie*. N'eus ket par da anoio-skiant bet treuzkemeret evit lakaat droug ennoun. Ya ! Ar skiantourien, setu tud a venn, hervez ar pezh a youc'hont, kaout muzulioù rik, muzulioù dik d'an traou, ha n'int ket awalc'h evit rei eun ano resis ha dres d'eur skiant. Sklaer eo ez eo ar ger *Cosmologia*, *Bedonie*, e rannadur *Wolf*, re ledan evit ar pezh a lakaer ennañ, evel ma ne vije ket ivez ar re veo a studier war lerc'h en *eneonie*, lodennou eus ar bed.



Argas a ran eta rannadur *Wolf*. Hervez ar pezh nou eus lavaret ne c'hell beza eur rannadur d'ar *Brederouriez* nemet diwar lodennou gwirvoudel ar gouvezad. D'imp-ni bremañ d'o dizolei.

Gallout a reer da genta holl diforc'ha er boudou kement a zo enno stag ouz ar c'horf, ha kement n'eo ket stag ouz ar c'horf, ha gant-se ranna ar *Brederouriez* etre *KORFONIEZ* ha *TREGORFONIEZ*.

Ar *GORFONIEZ* a vezo studi eus ar pezh a zo *KORF* er boudou, studi o stumm a gorf. Hogen ar ger « *korf* » e-unan a dalv da verka war eun dro ar c'horfou divuhez hag ar c'horfou buhezek. Setu perak en em zisrann dioustu ar *Gorfonie* etre diou lodenn.

O veza ma anvomp « *danvez* » ar c'horfou divuhez,

e c'hellomp aes-kenañ, ober *DANVEZONIEZ* eus ar studi anezo.

Hag ar *Brederouriez* war ar c'horfou buhezek, a vezo, na petra 'ta ? ar *GORFVEVONIEZ*, pe c'hoaz peogwir ez anvomp « *ene* » ar pezh a zo abeg ar vuhez, e c'hellomp ober anezi *KORFENEONIEZ*.

Ne vezo ket an *Danvezonie*, amañ er *Brederouriez*, eur skiant diwar arnod, met ar respont d'ar goulennou kenta holl diwar benn natur an *danvez* : petra 'ra d'an *danvez* beza an *danvez*, peseurt disparti a zo etre an *danvez* hag ar spered, petra eo an *ec'honder*, hag all... Ne vo studiet ganti nemet ar pezh a chom en tu-hont d'an arnoderez (*experimentatio*). Hag hevelep tra gant ar *Gorfeneonie* ne sello amañ nemet ouz ar pezh a chom en tu-hont da skiantou an arnod diwarbenn ar vuhez : petra 'ra d'ar vuhez beza ar vuhez, hag all...

Eil lodenn vras ar *Brederouriez* a vo ar studi eus ar pezh a zo er bed en tu-hont d'ar c'horf, ha setu perak ez anvomp anezi an *DREGORFONIEZ*. (1)

En tu-hont d'ar c'horf emañ da genta kement hag a zo spered. Setu penaos e vo ar *SPEREDONIEZ* lodenn genta an *Dregorfoniez*. En he labour e vezo anataat petra eo ar spered, petra eo ar youl, petra eo ar reiz ? Penaos e teu ar spered da vezout ? Daoust hag e c'hell mervel ? hag all...

Hogen e pep boud, pe gorf, pe spered e vefe, ez eus c'hoaz doareou a zo chomet dizoloet. Boudou ez eus, hogen en o stumm a *VOUD*, n'int ket bet c'hoaz

(1) Ar ger « *TRE* » o talvezout « en diabarz, en tu-hont, dreist », e vo eta an *Dregorfoniez*, ar skiant eus ar pezh a zo en tu-hont d'ar stumm a gorf, dindan ar stumm a gorf, dreist d'ar stumm a gorf.

studiet. Petra eo beza eur boud ? Penaos e c'hell ar boudou beza lies ? Penaos e c'hellont kemma, mont eus eun eil doare d'egile. Ar studi-se diwar benn ar boudou evel boud, penaos envel anezi, nemet BOUNDONIEZ.

Er Voudoniez avat ez eus diou lodenn. Gallout a reer end-eeun sellout ouz ar boudou e giz boudou e daou zoare disheñvel-kaer : Sellout ouz ar boudou en eun doare difetis (in abstracto), ha studia enno o stumm a voud, petra eo beza boud, h.a. — Pe sellout ouz ar boudou e-giz boudou fetis, ouz an holl voudou a-stroll, evel m'emaint o vezout, evit klask penaos ez int deuet da veza, petra e talvezont, da betra ez eont. Hag o veza ma anvomp « Hollved » strollad an holl voudou fetis, e c'hellomp staga ouz an eil lodenn-se eus ar Voudoniez eun ano d'ezi hec'hanan hag ober anezi an HOLLVEDONIEZ.

Diwar ar voudoniez ez omp douget da vont pelloc'h. Rak boudou ar bed, ne gavont ket enno o-unan o abeg diweza, hag e rankomp mont betek eur Peurvoud. Lec'h a zo eta goude ar Voudoniez da glask petra eo ar Peurvoud, daoust hag e vefe unan pe lies, pere ar perziou anezañ, h.a. Goude ar Voudoniez ez eus ar BEURVOUDONIEZ pe DOUEONIEZ.

Dastumomp bremañ en eun daolenn kement hon eus displeget betekhen hag e kavomp :

Korfoniez	{	1. Danvezoniez	} Eneoniez pe Bevoniez
		2. Korfvevoniez pe korfe- neoniez	
Tregorfoniez	{	1. Speredoniez	}
		2. Boudoniez	
		3. Peurvoudoniez pe Doue- oniez	

Skoulmet hon eus Korfvevoniez ha Speredoniez dindan an hevelep ano ENEONIEZ, hag aes eo kompren perak ha penaos ez eo an eneoniez a-c'haoliad war ar c'horfou hag ar speredou. Rak **ene** a anvomp pe a zo abeg ar vuhez, pe e vefe buhez en eur c'horf, pe e vefe buhez anez eur c'horf. An Eneoniez a zo ivez eta kement hag ar VEVONIEZ.



Koulskoude, skeudennet evelse, n'eo ket c'hoaz hon taolenn peure'hraet na klok da vat. Rak e dalc'h an eneoniez, etre ar Gorfoniez hag an Dregorfoniez, e ranker sevel studi an den. An den evit gwir nen eo na loen rik, na spered rik. Na loen nag ael, met war eun dro an eil hag egile. Etre ar Gorfvevoniez rik hag ar Speredoniez rik, ez eus eta an DENENEONIEZ.

Skoulmet sellout spisoc'h outi ha dizolei al lodennou anezi.

An ene eo abeg ar vuhez, evel m'hon eus lavaret ; hag ar vuhez en em ziskouez gant oberou. Pez a zo kenta holl eo eta skiant oberadurez ene an den. Ha peogwir e teuer diwar an oberou, da anataat ar gal-loudeziou ma strink an oberou diouto, e c'heller diwar an oberadurez, mont betek stummadurez-dia-barz an ene. OBERADUREZ ha STUMMADUREZ ene an den, setu an diou lodenn genta eus an Deneneoniez. Hag o veza ma 'z int traou postek, traou anezo o-unan, traou anat enno o-unan, e c'hellomp ober anezo an DENENEONIEZ POSTEK. (1)

(1) Pez a anvomp Deneneoniez postek eo ar pe a reer anezañ Psychologia. Eur wech ouspenn eo Psychologia eur ger treuzkemeret, ha re ledan evit ar pe a lakaer dindanañ, a zo hepken eur rann eus studi ene an den.

Goude beza studiet oberou ha galloudeziou an ene enno o-unan, e teuer da c'houlenn da betra e labour an ene, pehini eo finvez e c'halloudeziou ? E-kichen an deneneoniezh postek ez eus eta eun eil lodenn vras da studi ene an den, an DENENEONIEZ — FINVEZI.

E pep boud ez eus an degemer hag ar ro. An degemer en ober ene an den eo an anaoudegez ; ar rei eo avat an ober diwar vennout. Daou stumm-ober hon eus da studia a bep eil o finvez, anaoudegez ha youl, pehini finvez pep hini ?

An anaoudegez, petra eo ar finvez anezi ? ar wirionez ? Daoust hag e c'hell honreiz tizout ar wirionez ? Daoust hag e c'hell ar spered en em anavout, ha kaout krog war ar gwirvoud diabarz ? Hag-heñ e c'hell ar skiantou-santout anavout da vat, ar gwirvoud diavaez ? Setu kudennou e vez pleustret warno gant ar SKIANTVARNEREZ.

Gallout a reomp anavout ar wirionez. Anat eo koulskoude ne wel ket an holl dud en hevelep doare hag ez eus lod oc'h enebi ouz soñjou ar re all. Evit kaout ar wirionez eo ret da genta ober ez reiz gant ar reiz, hag implijout ar c'healiou (ideae) hervez an natur anezo. Lezennou a zo d'ar Poell a ranker senti outo da vont d'ar wirionez. O dizolei hag o displega a vo labour ar POELLREIZEREZ.

Met ne vo ket awalc'h gouzout lezennou-diabarz an anaoudegez ha senti outo. Ken ret all eo ivez d'ar spered senti ouz lezennou ar gwirvoud diavaez, ha mont d'ez hervez lezennou an danvez ma pleustrer warnañ. Penaos en em zibab evit tizout ar wirionez war an dachenn-mañ-tachenn ? Eun « hentenn » a zo da vont ganti, da lavarout eo eun hent resis gant

lezennou spis. Ar skiant eus an Hentennou-se, an HENTENNONIEZ an hini eo, (1)

Ha bremañ, goude an anaoudegez, e chom da glask diwarbenn ar Youl, pehini he finvez ha pehini an hent da dapout ar finvez-se ? Setu pezh a ziskleir ar YOULREIZEREZ.

Ha ne chom ken d'ober nemet sellout dre vras ouz an deneneoniezh evit pleustri war ar c'hudennou chomet c'hoaz direspont. Evel diwar-benn n'eus forz pe-seurt boud, e c'hellomp goulenn petra eo ene an den, eus pelec'h e teu, da belec'h ez a ? Ar respontou degaset a vo an DENENEONIEZ DRE VRAS.

An Deneneoniezh a zo eta anezi :

(1) « Hentenn » a ran evit trei ar greslaneg « Methodos », veza ne gavan ket « Hent » resis awalc'h.

- | | |
|---------------------------|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| 1. Deneneonie
dre vras | |
| 2. Deneneonie
postek | { Oberadurez
Stummadurez |
| 3. Deneneonie-
finvezi | { Skiantvarnerez (Critica)
Poellreizerez (Logica)
Hentennonie (Methodologia)
Youlreizerez (Ethica) |

Adlakomp bremañ an Deneneonie elec'h m'emañ e rannadur ar Brederouriez, ha setu an daolenn anezi :

- | | |
|--------------|------------------------------------------|
| Korfoniez | { Danvezonie
Korfeneonie |
| | — Deneneonie |
| Tregorfoniez | { Speredonie
Boudonie
Peurvoudonie |



OBEROUR GWRAC'H AHEZ ?

Eus pelec'h e teufe ar barzoneg hon eus embannet en niverenn diweza dindan an ano « *Gwrac'h Ahez* » ? Setu pezh a skriv d'imp an ao. Fransez Vallee :

« E Dastumad kanaouennoù Penguern ez eus eur c'haierad war ano « *Gwrac'h Ahez* ». N'emañ ket e Levr di Broadel Bro-C'hall (1), hogen e levr di Roazon. Kavet e oa bet e stal Durance, levrier levriou koz ha bet roet d'in... Her roet em eus da Levr di Roazon, a-unan gant kaieradou all dianket eus an Dastumad hag a oa ivez e ti Durance. Bez' e kaver e kaierad « *Gwrac'h Ahez* » eur brouilhed kemeret, evit doare, diwar diweuz ar c'haner gant an Itron de Saint Prix, hag eilskrivadur Kerambrun.

« Embannet em eus e *Memoires de l'Association Bretonne* ha war *Groaz ar Vretoned* eun darn eus ar c'hanaouennoù kavet e ti Durance. N'em eus ket embannet avat *Gwrac'h Ahez*, diaes-diaes da ziluzia ar brouilhed anezi. Tamallet e oa bet da Gerambrun beza skrivet eus e benn e-unan ar ganaouenn en he fez. Bez' awalc'h en deus ranket adober eun darn eus ar poziou, ar re a oa re luziet e brouilhed an Itron de Saint Prix.

(1) Dastumad kanaouennoù Penguern a zo bremañ evit al lodenn vrasa e Levr di Broadel Paris. Diwar-benn an Dastumad-se e c'heller lenn e « *La Villemarqué, sa vie, ses œuvres* » Champion, Paris, 1926, ar pajennoù 159-161, 175-180, hag an notenn p. 207.

« Diwar benn Kerambrun, a reas da sekretour da Benguern n'ouzon netra, nemet e voe tamallet d'ezañ beza falset kalz a beziou — eun tamall n'eo ket gwir war va meno. Kar e oa da Zenez Kerambrun, bet noter e Benac'h hag em eus klevet hemañ oc'h ober eur veuleudi dleet eus ampartiz e gar. Eun tammig paotr « disoursi » ez oa, am eus aon. »

Hogen eul lenner all eus e du a sura emañ Gwra-c'h Ahez e Dastumad Penguern e Paris. Moarvat ez eus meur a bez gant an hevelep talbenn, pe gentoc'h meur a eilstumm eus an hevelep gwerz e Paris hag e Roazon.

« Bez' ez eus en dournskridou Penguern, emezañ, gwerziou all par da Wrac'h Ahez, evel ar Bleizi, ar Paour, hag all.

« Kalz eus kanaouennou Penguern a zo bet embannet war *Melusine*, *Annales de Bretagne*, ar *Revue Celtique*, mar ne fazian ket. Keit all a zo abaoe avat ma tle beza dibaot awalc'h ar genvroiz o deus lennet anezo. »

Eur C'hermarker nevez a c'houlenner eta, eun den evit kuñtuilh e Dastumad Penguern, e Dastumad an Uhel, h.a. kement gwerz a ve splann enni evel e Gwra-c'h Ahez, perziou dibar hon speredegez, eun den a ijin ha barz awalc'h evit peurober pezh n'eo ket peure'hraet...

Ha perak ne zeufe ket unan adarre ?

M. G.

FOLLEN-C'HERIADUR FEUILLE DE VOCABULAIRE

- ANADUREZ, fém. — évidence.
 ANATAAT, verb. — mettre en évidence, rendre évident.
 ARNOD-OU, masc. — Essai, expérience. SKIANT
 DIWAR ARNOD, science expérimentale.
 ARNODEREZ, masc. expérimentation, la méthode expérimentale.
 ARVESTI, verb. — contempler. SKIANT — AR-
 VESTI, science spéculative.
 BEZOUT, verb. — exister. De là, BEZOUT, existence.
 BOUD-OU, masc. — l'être. L'infinitif BOUT, être, est employé presque exclusivement dans les dialectes de Vannes et de Cornouailles.
 BOUDONIEZ, fém. — la science de l'être, Ontologie.
 BROUEZ, fém. — emportement, colère.
 KENED, fém. — la Beauté (au sens abstrait). Le mot KAERDER-IOU, étant employé au sens concret.
 DESKAD-DESKIDI, masc. — élève, disciple.
 DIK, adj. — exact, précis.
 DIFETIS, adj. — abstrait, contraire de FETIS qui veut dire compact, concret.
 DIFORC'HA, verb. — distinguer.
 DRES, adj. — correct, juste. EVEL DRES = comme de juste. Cf. DRESA, réparer, mettre en état.
 EC'HONDER-IOU, masc. — espace.
 ENVEL, verb. — comme ANVA, nommer.
 FINVEZI, verb. — donner une fin à. DENENEONIEZ — FINVEZI, psychologie humaine finaliste.

GOURVEZ, verb. — être étendu, s'étendre.
 GOUVEZAD-OU, masc. — la chose connue, le connu.
 GWIRVOUDEL, adj. — réel, objectif (gwir — houd — el). LODENNOU GWIRVOUDEL AR GOUVEZAD = les parties réelles et objectives du connu.
 HOLLGEALOURIEZ, fém. — idéalisme (KEAL-IOU = idée).
 HOLLVED-OU, masc. — univers.
 YOUL-OU, fém. — volonté.
 MEIZ, masc. — intelligence.
 MEIZVARNOURIEZ, fém. — critique de la connaissance, Logique majeure.
 OBERADUREZ, fém. — activité (au sens général et abstrait).
 PREDEROURIEZ, fém. — philosophie (preder = réflexion).
 POSTEK, adj. — stable, positif. DENENEONIEZ POSTEK, philosophie humaine positive.
 POELL, masc. — raison, D'où POELLATA, raisonner, POELLATADENN, un raisonnement.
 RANNADUR-IOU, masc. — division.
 SKIANTOUR-IEN, masc. — Homme de science, scientifique.
 SKIANTVARNEREZ, masc. — critique de la connaissance. Le suffixe EREZ est plus objectif que OURIEZ, et désigne une activité en elle-même. Le suffixe OURIEZ, est au contraire subjectif, et désigne une activité ou un art dans le sujet qui l'exerce ; d'où son emploi pour traduire les -ismes français, cf. plus haut HOLLGEALOURIEZ.
 STUMMADUREZ, fém. — constitution, morphologie.

Achetez le *PETIT DICTIONNAIRE PRATIQUE BRETON-FRANÇAIS* de Roparz Hémon, 22 francs, Boîte Postale 75, Brest.

Studi hag Ober

Dastumadenn drimiziek
 Rener : Loeiz ar Floc'h

Koumanant bloaz : 15 lur

Kas pep lizer hag an arc'hant da :
Abbé Louis LE FLOC'H
 Vicaire à Guingamp (Côtes-du-Nord)
 Compte Chèques Postaux 34.212 EENNES
